



KATEL AUTRET

Diskan.

E-vel d'hoc'h en Breiz N'euz ket u-nan, N'euz ket
e-vel d'hoc'h, ô Sant Ervan, N'euz ket e-vel d'hoc'h, ô
Sant Er- van !

I

Katel Autret a barrouz Plistin
A lere d'he mamñ deuz ar mintin :

- « Mam, me n'allan mui finval ezel,
 - « Hep dale vo red d'ho merc'h mervel.

 - « Mervel hep dale e vezo red,
 - « Nemet gant Doue venn zikouret.

 - « Kri vezo d'am c'halon ho kouitât
 - « Ha mervel da barzek la, mam vad !...

 - « Mar keret, mam gez, me iel em-berr
 - « Bete be Dom Ervan Landreger.

 - « Dom Ervan, eme, ra burzudo,
 - « Vel ma re gwech-all sent koz ar vro. »
- « Doue ha Dom Ervan vinniget
« Da rei d'hac'h, merc'hig, ners ha iec'hed ! »

II

Doustadig, doustadig e teue,
Pevar fleged war hec'h inkane.

He mevel Herve a zo gant-hi ;
Ho daou e teuont en eur bedi.

Uz d'ar Pont-Losket pa arriaz,
Da gad tour Landreger e sellaz,

Da gad tour Landreger e selle,
Ha Katel n'eur welan a lere :

« M'ho salud, mei, iliz Zant Tual !
« Evel-d-hoc'h er vro n'euz ket eunn all.

« N'euz iliz ker kaer na ker brudet :
« Dom Ervan dindan-hoc'h zo kousket.

« Hag evit-han da vean maro,
« E sikour bepred tud kez he vro.

« Otro sant Ervan, c'houi rei ive,
« C'houi reio d'in iec'hed ha bue. »

— True oa gwelet el Landreger
Ar plac'hig kez o tiskenn enn ker.

Evel eur bugel oa mailluret,
Ha war hec'h inkane amarret. —

« Pedet evid-on, Landregeriz,
« Ha me gavo iec'hed 'n hoc'h iliz.

« Goulennet ouz Ervan Kervarzin
« M'allin c'hoaz pedi war ma daoulin. »

Kri ve ar galon na ve rannet,
Pa oe arri enn tal ar porchet ;

Ha hi douget war brec'h he mevel,
O tiskenn da gad ar be zantel.

- « Otro sant Ervan, ma chileoet,
- « Rak me zo deut a-bell d'ho kwelet.
- « Gant fianz onn deut ha karante,
- « Da glask ners ha bue war ho pe. »

Seiz sun eo bet eno gourveet,
Seiz sun war ar be he deuz pedet.

Seiz sun deuz pedet a galon vad ;
Allaz ! ne deuz ket bet he mennad.

Gwelan re o toned ac'hane,
Gwelan re o poked d'ar min be.

Ha da zant Ervan e levere :
« Me deui c'hoaz da bedi war ho pe !

« Enn-hoc'h man ma oll fianz bepred :
« C'houi ma gwelleo, sant binniget. »

Hag ouz hi c'hlevet o kimmiadi,
Ann dud vad a wele evel-t-hi.

Gwelan re ann oll ouz hi gwelet
War hec'h inkane adamarret.

Kalz so et d'he heul hag hi poaniet,
War hent Landreger d'ar Pont-Losket.

Eunn hanter-leo pe war-dro deuz ker,
He deuz gret eur zell ouz Landreger.

- « Kenavo 'ta, otro sant Ervan !
- « Enn-hoc'h em oa fianz enn em foan.
- « Petra vo laret enn ti ma zad,
- « P'arriin er ger hep ma mennad ?
- « Ha ma mammik paour, petra laro ?...
- « Me ne gredan mui distrei d'am bro !...
- « Otro sant Ervan, m'ho kar bepred ;
- « Enn hano Doue, ma gwelleet ! »

Kerkent e welaz enn dro d'ezhi
Evel eur flamm-tan o lugerni ;

Ha kerkent ar plac'hig neuz kriet :
« Sant Ervan, c'houi neuz ma gwelleet !... »

III

Enn de-se ne vije den enn ker
Na ganje o klevet ar c'hleier.
O klevet ar c'hleier oc'h embann
Ar mirakl neve-c'hret gant Ervan.
Kanan rent oll a greiz ho c'halon,
War eunn dro gant ar prosesion,
O welet, war-lerc'h ar paniero,
Katel Autret o tistrei enn dro ;
O tistrei joauz war he zreid-noaz
Ken divaingn ha ken iac'h ha biskoaz.
War be sant Ervan eo daoulinet,
He frot koar he deuz d'ehan roet.
Ha gant ann oll ar plac'hig vian
A gan melodi da zant Ervan.
Neb a bed sant Ervan, ha dalc'h-mad,
A zo bepred sur deuz he vennad.

Ar werzig-man am euz-me zavet
Da *Doktor* (1) zant Ervan vinniget.

LAOUENANIG ZANT ERVAN.

Imprimatur.

Brioci, die vigesima nona Mart. 1887.

† EUGENIUS,
Epis. Briocen. et Trecoren.

(1) Ann Otro de la Borderie, neuz kement labouret da zikour zével
Be neve ha Bue neve Zant Ervan.